


MAM AR MARTOLOD




Ma mab a zo bet kol-



let war ar mor ar bla man Bi -



ken ken na vo kavet ha bepred hen klas-



kan.

Ma mab a zo bet kollet war ar mor ar bla-man ;
Biken ken na vo kavet, ha bepred hen klaskan.

Bep beure, e-tal an ôd, me ya 'vit hen kavet ;
Me hen goul gant ar mor don : ar mor na respont ket.

Me ya da gorn ar vered 'lec'h eo beziet ma zud ;
Me hen goul gant an douar : an douar a chom mud.

Nag ar mor nag an douar n'o deuz d'in respontet.
O Doue ! na welin ken ar mab am euz ganet !

C'houi 'poa, Gwerc'hez truezus, korf ho mab da bokad,
Hag eur be ho poa ive 'n ho kichen d'hen lakad.

Pa vin ét deuz ar bed-man, ma c'herent, me ho ped,
Na douget ket ma c'horf paour e-unan d'ar vered.

O ! Douget ma c'horf d'ar mor, an de ma vin maro.
Euo, na hir 've an hent, hon daou ni 'n em gavo.

DIR-NA-DOR.